

paket doh ar mintin, lakeat or ar c'havell oh an noz ; e-lec'h al legest neu, boued koz, c'hwez fall ganta, hennez 'zo ar gwella toud evit al legest.

Boueta : /'bueta/, /'boeta/, appâter, mettre de la boîte dans un casier. *Eat eo bet da voueta e gevel. Boetet gand kranked frityet.* N. Le dictionnaire Robert ne connaît pas le verbe "boëtter" en usage chez les pêcheurs. Le mot vient directement du breton *boued* (nourriture).

Bouhal : hache. *Soaz ar Vouhal* (sn). *Kroaz ar Vouhal* (nl). *A bep oad e vez lakeat ar vouhal er c'hoad* (à tout âge on met la hache dans le bois ; allégorie sexuelle).

Boujant : en bonne santé. *Boujantig toud an dud. Boujant eo da dad ?*

Boujienn : bougie. *Eur voujienn 'zo var an daol. Alumi eur voujienn en iliz evit kaoud sikour* (demande de grâce).

Bouked : bouquet (de fleurs).

Boul : boule, bouée de casier (mar.). *Eur boul round. Eur boul houarn. Ni 'zo bet o klask boulou ae, 'barz ar Ruskumunog ae : ar re ramase toud an dra-e, ar re deue en aod er goañv, e-hiz peñse, ha ni a brene an dra-e da houde ganto.*

Boulc'h : entame. *Boulc'h ar bara.*

Boulin : bouline de voile d'étai. *Eur boulin yoa or horre hag e ve lakêt e-barz an obañch hag e ve troet adarre or ar boulin goul-stae. Da vira a-vourz a zerviche ar boulin surtoud. Ale, laosk ar boulin ; ar goul-stae deue adarre da labourad kwa.*

Boulina : /bu'li·na/, bouliner (mar.). *Admetom emaut or ar bourz-se evit vira a vourz hag e teufe a-benn ar batimant ; hennez e-neus kollet e herr deja ma n'eo ket boulinet ar goul-stae e pako ket an avel, ar goul-stae deu en tu-mañ dastu, e-lêc'h ae e pako ket an avel doc'h an tu all hag e viro a-vourz. Boulinet oleven.*

Bouloujeur : boulanger.

Bounta : pousser, heurter. *Bount an nor.*

Bountoun : bouton (couture). *Ne heller ket lakaad an toullou hag ar bountounou doh ar memez tu* (dict. on ne peut pas donner tous les torts à une seule personne ; il faut écouter deux sons de cloche).

Bourdachou : /bur'da·ʃu/, bordage (mar.).

Bourz : bord. *Prest da vira bourz ! Ale, vir a vourz ! Kentoc'h, 'bourz ar gobiri ve evet gwin, eñ ?!*